

D'an 28 a viz Gwengolo

- E 419, e Betleem, ganedigezh en neñvoù santez Eustochium, gwerc'hez. Gant he mamm santez Paola e teuas eus Roma evit adkavout sant Jerom ha bevañ er manati en doa diazezet e Betleem. Eno e skedas he santelezh hag ez eas davet an Arloz.
- E 485, distro da Zoue ene sant Faost a Riez, abad Lerina ha da c'houde eskob Riez e Provañs. Ganet e vefe e Breizh-Veur. Mignon e oa da sant Sidoan Appoliner. Skrivañ a reas a-enep an ariaded a-zivout Komz Doue deuet da vout den hag a-zivout ar Spered Santel kensolwez gant an Tad hag ar Mab ha kendrafadel ganto. Kaset e voe d'an harlu gant ar roue ariat Eurig.
- E 935, merzherenti sant Wenseslaz, dug Bohemia, merzher. Desavet e voe war hent ar furnez doueel ha denel gant e vamm-gozh santez Ludmilla. Deuet da vezañ dug en em ziskouezas strizh evitañ e-unan, peoc'hus e mererezh ar vro, leun a vadelezh evit ar beorion. Prenañ a reas e-leizh a sklaved war marc'had Praga evit o badeziñ hag o dieubiñ. Hogen e savas kalz eneberezh outañ dre ma klaskas ren e sujidi war hent ar reizhder hag ar feiz glan. Trubardet gant e vreur Boleslaz, e voe lazhet gant goprlazherion en iliz Boleslava.
- Gouel Merzherion Bro-Japan: sant Laorañs Ruiz hag e geneiled, lakaet d'ar marv etre 1633 ha 1637 e Nagasaki. C'Hwezhek merzher e voent, en o zouez 9 japanad, 4 spagnad, hag ur gall, sant Guillaume Courtet, den lik a skoazelle an Dominigaded. Laorañs Ruiz a zo ar merzher filipat kentañ bet santelezet.
- E Breizh, e 1038, ganedigezh en neñvoù sant Gwingurian pe Yungourian, breur lik e abati Rewiz, dindan sant Feliz.
- E 1364, en Alre, ar gwenvidig Charlez Bleaz, feizvonnour. Pa zimezas gant Janed Pentevr e oa diouzh diferadur ar c'hevrat e kemerfe armoù Breizh hag e urvfe ouzh Yann III a oa divugel pezh a nac'has Yann Voñfrozh. Neuze e krogas Brezel Hêrezh Breizh a freuzas ar vro e-kerzh ugent vloaz gant an tu Bleaz harpet gant ar C'Hallaoued hag an tu Moñforzh gant ar Soazon. Karc'hariet e voe Charlez Bleaz e-doug nav vloaz e tour London. Deol, kuñv hag uvel e varvas da-geñver emgann an Alre, gwisket bepred gant roched reun ar binijenn ne guitae morse.
- Er VIIvet kantved, sant Konwal, beleg, Iwerzonad, diskibl sant Kendiern, abostolour Bro-Skos.

D'an 29 a viz Gwengolo

- Gouel sant Mikael, Arc'hael Da zeiz dedi brientiliz Sant-Mikael war ribl ar Via Salaria, c'hwec'h mil diouzh Roma, e lider hiviziken war un dro an tri arc'hael a vez diskuliet o c'hefridi er Skritur Santel hag a vez dizehan e gwazerezh Doue : Mikael e anv o talvezout "Piv zoevel Doue" hag a zo Tiern an aeled santel. Mikael a zo gwarezour Breizh ha Paeron ar Gelted.
- Er bloaz 556, distro da Zoue sant Siriag, penitiour e Palestina. E-pad hogos dek vloaz ha tri ugent e renas ur vuhez a binijenn er c'hevioù, skouer vev evit ar benitiourion ha defenner ar feiz reizh enep fazioù dalc'hidi Orijen.
- E 768, sant Murgal, abad en Iwerzhon.
- Deiz-ha-bloaz marvidigezh sant Maoris pe Morvan e Karnoed e 1191 a vez lidet d'ar 5 a viz Here.
- Deiz-ha-bloaz marvidigezh an den evurus Charlez Bleaz e-kichen an Alre e 1364 a vez lidet d'an 28 a viz Gwengolo.

D'an 30 a viz Gwengolo

- Er IVre kantved, merzherenti ar sent Ours ha Viktor. Izili eus Legion Tebez a-gevret gant sant Maoris e tec'hjont rak ar marv e lazhadeg Acaunum (hiziv Agaune), hogen e voent merzheriet e Solothurn (hiziv Soleure) lec'h m'emañ an iliz-veur dindan o faeroniezh.
- Er IVre kantved, merzherenti sant Leopard, ofiser ti Juluan an Dianzavour e Roma.
- War-dro 305, sant Gregor ar Gwelevour, eskob, abostolour Armenia. Badezet e Kaezarea Kappadokea hag eskobet gant sant Leoñs, e kanttroas ar roue Tiridad a vennas degas ar feiz kristen

d'e bobl. Goude labourioù abostolek liesseurt en em dennas en ur c'hraou en hanternoz kember divrec'h an Eufrat. Darn eus e relegoù a vez miret e Bro-C'Hall e Pithiviers, en iliz Sant-Salaün ha Sant-Gregor, war un dro gant re ar roue breizhek Salaün III.

- Er bloaz 420, ganedigezh en neñvoù sant Jerom, beleg abad, doazhour eus an Iliz. Ganet e Dalmasia, e voe badezet e Roma ha beleget en Antiokeia. Mont a reas da Vro-Siria da ren ur vuhez penitiour. Distroet da Roma e voe karget gant ar pab Damaz da dreiñ ar Bibl e latineg. Anavezet eo e droidigezh dindan an anv a Vulgata. E Betlehem e tiazegas ur manati evit menec'h hag un eil evit manac'hezed.

- E 1572, e Roma, sant Frañsez Borgia, beleg. Hag eñ dug Gandia e Kastilha e tibabas, goude marv e wreg en doa bet eizh bugel ganti, mont e Keneilezh Jezuz. Diuzet Jeneral e voe evel un eil diazeour evit ar Jezusted hag unan eus oberourion bennañ an adreizhidigezh katolik.

- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Louri (Lt. Laurus, Gg. Léry), penitiour-beleg e koad Pourc'hoed, war-lerc'h sant Elouan, gwarezet gant sant Jezekael roue Breizh, bet manac'h e Gwazel e manati sant Mewen. Emañ e vez en iliz parrez a zoug e anv Sant-Louri e Bro-Sant-Maloù.

- Er bloaz 610, sant Midan, abostolour en enez Von.

- En Iwerzhon, e 714, sant Conna, abad Clúain Ioráird.

- En Helvetia sant Maengal (hIw. Moengal, Lt. Marcellus, Gl. Maginold), a vevas er VI vet ha VII vet kantved, manac'h gant sant Gall.

- Dedi iliz-veur Sant-Pêr eus Naoned.

- Dedi iliz-veur Sant-Steven eus Sant-Maloù.

- E 1953, diazezidigezh Abati leanezed kisterkiat Kempenieg.

D'ar 1 añ a viz Here

- War-dro ar bloaz 400, sant Aizan, roue Abisinia. Ren a reas gant e vreur sant Sazan en doa kevredet ouzh ar gador-veur. Badezet e voent o daou hag e kendaoljont kalz da skignañ an Aviel en o bro.

- Er IVre kantved, e Tournai, merzherenti sant Piaton. Genidik eus Bro-Benevento e voe avielour pobloù hanternoz Gallia.

- E 659, e Ghent e Belgia, sant Bavon (e Lt. Alowinus), abad. Goude marvidigezh e bried ez eas da vanac'h hag e voe diskibl ha kenlabourer sant Amand. Sevel a reas ur manati lec'h ma echuas e vuhez.

- E 1897 e Lesawez, distro da Zoue santez Tereza ar Mabig Jezuz, gwerc'hez, doazhourez eus an Iliz, patromez ar misionoù. Ganet en Alençon e 1873, e voe degemeret d'he femzek bloaz e Karmez Lesawez (Lisieux e Bro-C'Hall) ken abred. E-doug an nav bloavezh a dremenas er c'harmez e pleustras hag e kelennas hent ar vugalerezh speredel, he hent bihan hag a voe brudet dre he skrid Istor un ene en em ledas dre ar bed a-bezh.

- E Breizh er VIIvet kantved, santez Uriell ha santez Oanez, gwerc'hezed, merc'hed sant Yuzhael ha santez Pridell, c'hoarezed sant Judikael a zDevnon, roue Breizh.

- Er VIvet kantved, sant Gwivarc'h, beleg-abad Meifod, kelenner sant Suliav.

- War-dro 677, e Condé e Bro-C'Hall, sant Gwaznou (Gl. Wasnon), Iwerzhonad, abostolour Hannonia (Gl. Hainaut). Tec'het en dije diouzh e vro abalamour d'an heskinadurioù gant e vreudeur ar sent Govan, Aelgiz, Boethian, Elog ha Mombl. Erruet e Condatum (hiziv Condé) war-dro 633 e savas e beniti war lein un dorgenn goadeg lec'h m'emañ bremañ iliz an Itron-Varia.

- D'an hevelep deiz, Sz Clochra, maouez santel e bro gCorgaigh en Iwerzhon.

- E 666, distro da Zoue sant Koulm, manac'h e Bangor en Iwerzhon.

- Er VIIvet kantved, sant Sineall, eskob abad Magh-Bile en Iwerzhon.

- War-dro 845, tremenvan sant Benead Merzherig a vez goueliet d'an 22 a viz Here da zeiz treuzlec'h e relegoù a zo bet miret e-pad pell en abati Redon.

D'an 2 eil a viz Here

- Gouel an Aeled Vat. Gouestlet da gentañ da arvestiñ ouzh splannder dremm Doue e vez lakaet an aeled ivez gant an Aotrou e gwazerezh an dud ouzh ho ambrougañ hag o gwareziñ en un doare diwelus met evezhie-k-meurbet.
- Er Iañ kantved, santez Damaris, maouez eus Aten gounezet d'ar feiz diwar brezegezhezh sant Paol (kv Ob, 17,34).
- Gouel ael gwarezer ar gêr pe ar rouantelezh a gaver e Bro-Spagn er XVvet kantved. Gouel an ael mirer, d'ar 1^{añ} a viz Meurzh, a voe aotreet e 1514 gant Leon X war intrudu ar Gwenvidig François d'Estaing eskob Rodez. Enskrivet e oa bet en deiziadur roman e 1608 gant Paol V d'an deiz goude gouel sant Mikael ha d'an 2^a a viz Here gant Klemes X e 1670.
- En IIIde pe IVre kantved, merzherenti sant Eleuter Nikomedia (Gl. Éleuthère) gant keneiled niverus. Soudarded e oant, bet tamallet da vezañ lakaet an tan e palez an impalaer Diocletianus e voent dêvet ez vev.
- Er VIvet kantved, santez Skariberg, gwreg sant Arnould. Bevañ a reas er c'hlannded gant he gwaz a voe drouklazhet e 535 e Reims. Hemañ en doa goulennet bezañ seblat e-kichen bez sant Varzhin e Teurn hogen e chomas a-sav an ave a zouge e gorf e koadeg Ivelina lec'h ma voe douaret (hiziv Saint-Arnould-en-Yvelines). Eno e savas Skariberg ur peniti kent en em dennañ e Saint-Remy-des-Landes lec'h ma varvas tri bloaz goude he gwaz.
- E 679 war diriad Arras, ganedigezh en neñvoù sant Lejer pe Lezer (Lt. Leodegarius ; Gg Léger), eskob Autun, merzher. Kasaet gant Ebroin, maer palez Teodorig, roue Neustria, e voe harzet ha jahinet en doare krisañ kent bezañ drouklazhet. D'an hevelep deiz e reer eñvor eus sant Gerin, e vreur, brientin e Burgondia, bet labezet daou vloaz araozañ war urzh Ebroin.
- E 1879 e Lyon, gwenvedig Antoine Chevrier, beleg, diazeze Oberenn ar Ragevezh pe Prado evit stummañ beleion evit avialañ ar yaouankizoù.
- Er VIvet kantved, sant Mobhi, manac'h en Iwerzhon.
- Sant Giallan (Gouestlan), manac'h en Iwerzhon.

D'an 3 a viz Here

- Er Iañ kantved, sant Denez Areopajit, eskob. Gounezet d'ar feiz goude prezegenn an Abostol sant Paol dirak an Areopaj e voe eskob kentañ kêr Aten. War e gont e voe lakaet oberenoù ar pseudo-Denez evel an hini a-zivout Anvioù Doue pe c'hoazh an hini a -zivout an Urzhaz neñvel.
- D'an hevelep deiz, santez Bianca pe Candida, merzherezh e Roma. Douaret e bered Pontian e voe marteze gwreg sant Artem a vevs en eil kantved.
- E 959, ganedegezh en neñvoù sant Jerard, abad kentañ abati Brogne nepell diouzh Namur, en doa savet. Diazeze hag adreizhour abatioù e Bro-Flandrez ha Lotharingia.
- E Breizh, er VIvet kantved, merzherenti sant Meler pe Melar (Lt. Melarius, Kv. Kb. Meilyr), merzher, mab sant Meliav roue e Breizh ha santez Aourel, lazhet gant e eontr Rivaod.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Fragan (Lt. Fraganus), VI vet kantved, ganet war enez Vreizh (Kembre), pried santez Gwenn, tad sant Gwennole, a savas ur manati e Lokrist e Gwinevez Bro-Leon.
- En Iwerzhon, sant Mezelv (Iw. Modelbh), eskob ha sant Nevez (Iw. Nuadha), penitiour.
- E 695, ar sent Ewald ar Melegan hag Ewald an Duard, beleion veneadat. Bez' e oant menec'h en Iwerzhon pa zivijont mont da heul sant Wilibrord da avialañ Frizone ar c'hevandir. Da c'houde ez ejont da avialañ ar Saksoned hag e voent merzheriet e Anlerbeck Westphalia.
- E 1856, en Indiana, santez Mamm Teodora, (Anne-Thérèse Guérin), gwerchez, leanez, ganet e Staol e Bro-Sant-Brieg, diazeze Kongregadur C'hoarezed Ragevezh Doue

D'ar 4 a viz Here

- Er Iañ kantved, sant Hierothe, I añ eskob Aten a-raok sant Denez. Bez' e voe unan eus an 9 ezel eus an Aeropaj bet kanttroet gant sant Paol.
- Er IVre kantved, en Antiokeia e Bro-Siria, da-geñver heskinadeg Diocletianus, merzherenti santez Domnina hag he div verc'h, ar santezed Bereniz ha Prosdost. Meulet e voent gant sant Yann Grizostomoz ha sant Eosten evit bezañ kavet gwelloc'h en em deurel en ur stêr eget bezañ gwallet gant soudarded o c'hase d'al lezvarn.
- Er IVre kantved, ganedigezh en neñvoù sant Amoun, abad e kornôg delta an Nil. Gant sant Anton e savas "dezerzh al logelloù" lec'h ma teuas ouzhpenn 600 manac'h roet da vuheziñ pedenn an hesichasm pe bedenn ar galon pep hini en e logell.
- E 666, santez Aora, abadez e Pariz. Lakaet e voe gant sant Eloa e penn manati Sant-Marsial a ziazezas e Pariz e karter ar Marais evit tri c'hant leanez gant reolenn sant Koulman.
- E 1226, distro da Zoue, sant Frañsez Asizi, manac'h, savour ar Frañsezidi, Paeron Bro-Italia. Ganet eo en Ombria e 1181 en un tiegezh marc'hadourion binvidik. Galvet e voe avat gant an Oan Kroazstaget da adsevel e Iliz, neuze e nac'has un hêrezh kaer evit mont da embann an Aviel o vevañ er baourentez strishañ hag o kanañ kened ar grouadelezh. En Alvern e voe aotreet dezhañ bezañ treuztoullet gant goulioù ar Basion. Santelezet e voe daou vloaz hepken goude e varv gant ar pab Gregor IX. E vreudeur a zo anezho tri skourr pennañ : ar Frañsezidi, ar Gabusined hag ar Gouentidi.
- E Breizh, war-dro 590-632, sant Salaün II pe Salomon, lesanvet "ar Fur", roue Devnon (Domnonea), mab sant Judael ha santez Prizel, breur sant Judikael.
- Sant Finnan (eleze Gwennan e brezhoneg), manac'h e hanternoz enez Vreizh (deuet da vezañ Bro-Skos).

